

Sorceres.

Sellaouit hag e kleffot, hag he kleffot kana
eur wers a zo kompozet a neve vid ar bla.

zo gred da Katellik ar Gall peni deus gred sorcerez
evid laza an ed.

Katellik ar Gall deom leveret
Peni eo al louzou evid laza an ed.

Kenta ma haprouvis va louzou
Da c'houd ag en a voa mad.

e voa en eur warimad segal
hag en devoa va zad

a voa adet henri trivarc'h boëzellad ad
ne neus ked bed anezi daouzek skudellad vad.

— Ar ça ta Kattelik dem-ni a leveret
gant piou o c'heus disket
ar secrejou a c'houzorc'h evid laza an ed

— na gand eur c'hoarek iaouank a voa e ti va zad
am c'hasse bem-nos bem-nos na gantan d'ar Sabad.

Ar ça ta Katellik dem-ni a leveret
Pere e ta al louzou evid laza an ed.

— gant lagad kleï eul malfran a kalon an toussek
ar voëden radenen noz goel ian dastumet

Bed dindan an oter c'houel epad an offern bred
ar re ze eo va louzou evid laza an ed.

Me meus eur c'houffrik peun(1) e bars e ti va zad
Ag an ini en tigoro en devezo kallonad.

A zo henan teïr aer viber e gori eur serpent
kapab da leski ar bed man perpetuellament.

na mar deu dezo gouri ag ober blavez mad
he renko va zeïr aer beza konduet mad

nan deo ket gant kig klujar na gant kig kevellek
gant ar bugale vunut a ben ma vezint badezet

— Ar ça ta Katellik ar Gall, c'houi o c'heus meritet
Ar maro sertenamant pa distruijt an ed.

eun ivis rousinet a voa dei gouisket
eun torch koar ellumet
evid e lakad dar maro pa e dewa meritet.

Ma rache reflexion var nezi an oll plac'het
Da ziwel sertenamant doc'h visou fal ar bed.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) *Ms : peun ; faut-il lire : prenn ?*